

Guillaouic Calve.

Diganech va mam a c'houlenan
Konge da vonet da pardonnan
dar folgoat pe da santes Annan.

Guillaouic Calve din leveret
Piou o compagnones da vonnet
bis.....

nen deo sur ar peder fumelen
a zo bed aman brema soudan
bis.....

na pa voa o font var an ent bras
an otro ar chont a rankontras
bis

Guillaouic Calve din leveret
na pele ent ded pelec'h oc'h bed
bed on pedi evit ma euret *
oui eo ar c'henta meus pedet

Goulouik Calve din leveret
Na te ouiffe chouari ar fleuret

Ouari ar fleure(t) me na oar ked
Mes ar vas a zaou ben mar be red

Kri a viche ar galon na ouelche
tachen ar Folgoat an ini a ouelche.

O velet a i(e)ot glas o ruia
gant goad an tud chentil o skulia

nag ar merchedigou a ouelle
na ne kafchen den a kement o c'honsolje.

Guillaouik Calve enes a re.

tevet merc'hedigou na welit ked
Betek ar roue e red monet

Tri voer den chentil en eur vanden
da violi peder fumelen

* pa ves dime merch da amesec
me lezo ganes da c'hoareset
merch ma amesek na peso ket
rag ar garg a nei a zo din roet.

Debouchour derc'h roue a rouanes
me zo deud yaouankik do bales

Guillaouik Calve din leveret
Petra eo an tolfed a c'heus gred.

triverch den chentil a meus laset
An otro ar Bank an nuntek vet

Guillaouik Calve din leveret
Gant peseurt arm e c'heus e laset

Me ne moa nemert eur penn bas
elec'h ma voa nuntek klese noas

Guillaouik Calve din leveret
a te a wife ouari deus ar Soudardet

Dikasset id din aman er pors
nuguen ag uguen me na ran forç

Kri viche ar galon na voelche
tachen ar roue ma voelche.

O velet ar vein glas o ruia
gant goad ar Soudardet o skuilla

Na me skrivo did var paper guen
Da vale hardi en peb tachen

na me skrivo did var paper du
Da vale hardi en beb tu.

Les folios 107, 108, 109 rectos et versos sont écrits avec une encre verte.

(1) Mauvais classement de feuillets. Le texte du fol. 109 r. et v. n'est que la suite du fol. 107 recto.